





0 fr. 10

KOUSK BREIZ-IZEL !

0 fr. 10



An heol a zo kuzel, sethu echu an de,
Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave.

DISKAN

Kousk, kousk, Breiz Izel bro dispar
Sethu an noz o lond war an douar,
Kousk, Breiz-Izel bro ken mad
Mouez ar mor braz a zav d'az luskellat.

C'houez vad ar parkou gliz, hag al lann alaouret
Gant ar gliz-noz war ar maeziou a red.

Ar Vesaerien a gan o lastum o loened,
Gwerziou Bro-Vreiz ne n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrouz, me glev mouez an eostik,
Telenn-noz kanet flour ha dousik.

Uz da Vreiz o kousket an nenv steredennet
A lar ez eus eun Doue d'hon c'haret.





An neb a c'houez bemde a c'hone e renoz,
Vid an dud vad Doue 'neuz graet an noz.

Arvor, o douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Neuz bro a bed ken kaer war an douar.

BLEI LANNVAU.

PELL A VREIZ-IZEL !

Andantina Voix lente



Pell a Vreiz-Izel, ma bro garet,
Pell deuz he ne,
Ma c'halon baour a zo glac'haret
Ha trist ive ma ene.
Kaer am euz bale ha redek bro
Dre holl ar bed,
N'allan kavet levez eun dro
Pell a Vreiz-Izel karet.

DISKAN

N'euz fors pelec'h e tremenan,
Me zo divroet,
O ma Doue penos e vevan,
Pell a Vreiz Izel karet.

Bet on bet en Pariz hag en Rom
Ha pelloc'h c'hoaz,
Redet am euz dre ar broiou tom
Heb bout eurus biskoaz.

Er Franz, er Spagn, en Bro ar Saozon,
Meuz baleet,
Hag an hirnez a vroud ma c'halon,
Pell a Vreiz-Izel karet. Diskan

En Breiz-Izel em eus ma breudeur
Euz ma gortoz,
En Breiz Izel 'ma ma dous seder
O ouela d'in deiz ha noz.
En Breiz-Izel an douar santel
Ma zad kousket,
Me ive na c'houllan ket mervel
Pell a Vreiz Izel karet. Diskan

Efflam KOAT SKAD.



H 136